



TALABAO 7

ar gazetenn a ra trouz!



**40 PAJENN
E KORF HO TALABAO
AR BLOAZ-MAÑ!**

...HA KORNIAL A RA
MA AMEZEG AERODIN
EVIT KEMENN AN DİELL:
**İSTOR AR C'HARR-
-TAN, E 12 PAJENN!!**

TALABAO, KAZETENN AR VREZHONEGERIEN YAOUANK
ISSN 0982-8311 - CPPAP 69032



24,00 L

NEVEZ... NEVEZ? NEVEZ!

Bisousig

Ur romant gant ABEOZEN
Skeudennet gant Tudual Huon

Ul Levr SKOL AL LOUARN ***
Ment 11 x 17,5 cm
120 pajenn
10 skeudenn e gwenn ha du

45,00 L



Ar peroked

Ur romant gant Irma CHALTON
Troet diwar ar c'hembraeg gant
Mikael MADEG
Skeudennet gant Jorj AR MEUR

Ul Levr SKOL AL LOUARN **
Ment 11 x 17,5 cm
80 pajenn
10 skeudenn e gwenn ha du

35,00 L

AN HERE. Ho levrioù.



TALABAO, embannet gant AN HERE
Kazetenn ar vrezhonegerien yaouank
ISSN 0982-8311 - CPPAP 69032



Renner ar gazetenn: Alan DIPODE
© Copyright evit an holl bennadoù
ha tresadennoù gant AN HERE, 1988

Niverenn 7
Genver/C'hwevrer 1988

TAOLENN

Pêronig	4	Fañch An Uhel/Veig/Martial Menard
C'hoarromp...	14	Alan Dipode/Martial Menard
Istor ar c'harr-tan	15	Herve Kerrain/Alan Dipode
Marsel Tapiv, enklasker	27	Tudual Huon
An tri spes	30	Roparz Hemon/Alan Dipode
Ur sell war hon Istor	34	Lukian Kergoad/Alan Dipode
Clément Dagobert	38	Alan Dipode
An torr-penn	39	Alan Dipode
Dilhad labour	40	Kristian Creff/Serj Toulgoad

Naketenn ha pajennadur gant Alan Dipode

UR GERIG A-RAOK 1989...

Lavaret em boa, e pennad-stur TALABAO 1, penaos ne vije miñ a bernad-stur en ho kelac'henn... Setu ur bloavezh aet e-biou, ha dala'het 'm eus da'm ger!
Hiziv es eo disheñvel an traoù. Prenet hon eus skiant e ti an apotiker, ha di-
vizet hon eus tevat ha nevesat TALABAO evit ho prasañ plijadur (a gred deomp):
eizh pajenn ouzhpenn hag ur vaketenn nevez a ginnigomp deoc'h ar bloaz-mañ. Klask
a rañmp ober gwelloc'h, evel-just! Roit deomp da c'houzout petra 'zo mat ha petra
n'eo ket... Ale, bloavezh mat deoc'h, mignonesed ha mignoned, ha nebeut a oli-
fanted gouez en ho tier!

TARZBIG

Arabat didroc'hañ TALABAO! Gwelloc'h eo adskrivañ ar baperenn a gavot amañ-dindan!!

Ma c'houmanantit da dTALABAO, pa c'hourc'hemennan! Ra bado ar c'houmanant:

1 bloavezh (120 L) 1 bloavezh, komanant skoazell (adalek 150 L)

ANV _____ Anv bihan _____

Chomlec'h _____

Kêr _____

(Kargit ho chekenn en anv AN HERE, hag he c'hasit da: TALABAO, Ment-dall Kergelenn, 29112 LANDUDAL)



D'WAR UR GONTADENN FAÑCH AN UHEL
 TRESADENNOÙ: VEIG / KOMZOÙ: MARTIAL MENARD.
 1987



UR WECH E OA UN INTANVEZ PAOUR O
 CHOMER ER GROAZ-HOUARN E PLOUARED,
 HA N' HE DEVOA EVIT HOLL VADOÙ
 NEMET UN TI PLOUZ, UR MAB HAG
 UR VUOC'H.
 NEZAN A RAE TAMMOÙ NEUD EVIT
 O GWERCHAN ER CHOZH-VAR'HAD



HAG AR PAOTR A VEZE BEMDEZ
 O VESA AR VUOC'H WAR AN
 HENTOÙ, PA N'O DEVOA PARK
 EBET D'HE LAKAAT.



UN DEIZ PA OA GANT E VUOC'H WAR AN HENT, SKIAER AN AMZER HA TOHM AN HEOL, E TEJAS EN UN TAOL DA VEZAN TENVAL HAG E VOE SOUEZHET AR PAOTR O WELT UR CHARROÑS O TISKENN EUS AN NEUV EN E GICHEU,

HAG UN DIMEZELL GAER E-BARZH "Dont a rafes ganin da vevel ma factr?" EMEZ!

ele challan ket mont ha dilezel ma vuoc'h ha ma mamm

Kae da liseel da z mamm dont aman ma komzar ganti

WEL 2




"MAMM, DU-SE EZ EUS UN DIMEZELL HAG A C'HOULENN ACHANON DA VONT DA VEVEL GANTI; C'HOANT KOTIZ OUIZHOC'H HE DEUS MAMM; DEUT PRIN!"

KONTANT E VEC'H, MAHM-GOZH, A LARAS AR BRINSEZ A GAER CHARROÑS, DA LEZEL HO HAB DA ZONT GANIN DA VEVEL?

BETU ATAN DAOU CHANT SKOED EN AOUR EVIDOC'H HA KANT SKOED AR BLOAZ A ROIN D'HO HAB

NEUZE E KIMIADAS PERONIG DIOUZH E VAMM HAG EZ EAS ER CHARROÑS, HAG E SAVJONT EN AER UHEL

WEL 3



HA TEGOUEZHONT EN UN
ALE VRAS GANT UR
C'HASTELL KAER ER PENN
HAG UN NOR HOUARJET
WARNEZHAÑ
ANTREN A REJONT

NEIG 4



AN DEIZ WAR-LERC'H
AR BEURE E LÂRAS
AN DIMEZELL DEZHAÑ
"BREMAÑ EZ AN UN TAMMIG
EN HENT, HAG E CHOMI
DA-UNAN, MET NE VANKO
NETRA DIT"

DEUS GANIN, HA
TISKOUEZIN DIT
PETRA AZ PO
DA OBER

HAG EN KASAS
DA GENTAN
D'AR MARCHOSI


NEIG 5

SELL AZE UR GAZEG
HAG A VO RET DIT
KAOUT OUTI PEP DAMANT.
REIN DEZHI FOENN HA
MELCHON, HAG HE BALE
DIV WECH BEMDEZ.



SELL AZE UN' ALL
HA NE'Z PO KET
EZHOMM DA OBER
VAN OUTI.

SELL AMAN BREMAÑ
HOLL ALCHWEDIOU AR
C'HASTELL; GALLOUT A
RI BALE HA MONT LECH
MA KARI, NEMET UR
GAMER HEPKEN, AN HINI
A VEZ DIGORET GANT
AN ALCHWED - MAN



Sell mat outañ
evit m'oe anavezñ
ha gweñ a se dit
ma ne sentez ket!

VEIG 6

MA ! MET MA NE'M
BEZ NETRA DA OBER
NEMET SE, E KAVIN
HIR AN AMZER AMAN.

ROIT DIN UN DRA
BENNAK DA DREMEN
AN AMZER.



- PETRA A FELL DIT ?
- UR C'HOARI BENNAK,
UR C'HILHOÙ HAG UR
VOUL ARC'HANT AVAT.
- MA ! SELL AZE
UR C'HILHOÙ HAG UR
VOUL ARC'HANT.

- SELL AZE C'HOAZH
UR C'HILHOÙ HAG UR
VOUL AOUR : LAOUEN
OUT BREMAÑ ?
PETRA A C'HOANTAEZ
C'HOAZH ETA ?

- MAR AM BIJE UR
VOUALC'H AOUR AVAT
DA GANAÑ DIN DA
ZANSAI PA GAVIN
HIR MA AMZER
O C'HOARI C'HILHOÙ

VEIG 7



Ha bremañ ez an
kuit, n'ouzon ket kaer
pe e vin pell pe me
vin ket

MONT A RA PÉRONIG
DA REÏÑ BOUED D'AR
GAZEG, HA GOUDE EZ
A DA VALE ANEZHI ;
BUAN E OA EVEL AN AVEL



ARSA, EMEZAN
RET EO DIN IVEZ
GWELET AR
C'HASTELL
PA 'MAÑ GANIM
AN HOLL
ALC'HWEZIOÙ

VEIG 8



DIGERIN A RA UR GAMBR
HAG-EN DIGERIN DAOLAGAD
BRAS O WELET BERNIOÙ
AOUR HAG ARCHANT

UR GAMBR ALL OA LEUN A
BEP SEURT DILHAD, RE GAER
HA RE DISTER, DILHAD ROUANEZ
DILHAD PRIÑSED HA MEMES RE
PEIZANTED. UNAN ALL A
CHOARIOÙ HAG A VINVIOÙ SONEREZH

DA GENDREK
VEIG 9

C'hoariomp...

ESTRANJOUR AR GAEL


Er gael-mañ ez eus kuzhet 24 anv loened gouez, nemet unan hag a so d'aru, estrañjour ar gael... Diwallit! Ar memes liñherenn a e'hal bezañ implijet e meur a c'her! N'eus nemet div liñherenn ha ne servijont ket, Bez' e c'hellit lenn a gletz da zehou hag a zehou da gletz, eus an neot'h d'an traoñ hag eus an traoñ d'an neot'h.

Bronneg hag a vev en dour - Gwidreüs eo hol loen! - Ur penn skañv hag a lamm er gwez - Diwallit d'e bikoù! - Hennezh a roc'h! - Pebezh rederez spontidik! - Diwallit mat d'ho kwez-frouezh! - Flemm, flemm, flemm - Nag a gerial en e benn! - Gwechall e veze kavet e Breizh - Pri-ziet-kenañ e veze e feur gwechall - Logod ar maeziou - Kriener fri minoued! - Un dimezellig koant - Flaeriañ a ra pa vez spontet - Ur morvronneg eo hemañ - Itron ar garidennoù - Itron ar poullou - Daoulagad aour ha brud fall - Boued d'ar c'hazh - Ec'h! Loen lous! - Pebezh ble-venn gaer! - Kernieligoù en e benn. Ha setu an estrañjour:

K S A D U P S R O M
A V A L A O U E R N
E R E U N I G V E R
R A N A E R E N M A
E K H Z O G S I I U
L H Z A K A U W N O
L M A R T D O G O L
I G R U O D T E C I
Z I E L B R O C H R
Y O U R C H M E D

1000 hent-dall...

Pe dre hent e vo ret d'hon istrogell tremen evit dastum al loer, al lunedoù, ar vaneg hag ar boned en deus kollet? Skoazellit ar paour kaezh penn skañv a zo anezhañ!



DIELL

Kemmoù bras-divent a zo bet c'haarvezet e buhez Mab-Den abaoe ur c'hont vloaz bennak. Hogen unan eus brasañ kemmoù a zo bet, sur a-walc'h, eo an hini bet degaset d'ar c'has ha degas tud ha traoù dre an hentoù.

Istor ar c'harr-tan

gant Herve KERRAIN

E 1900 e oa diaes d'un den mont ouzhpenn 80 Km en un devezh, e-skoaz hiziv e reer kemend-all dindan nebeutoc'h eget un eur-vezh, ha 800 Km a zo tra aes a-walc'h da ergerzhet en un devezh.

An araokadennoù bras-tre-se a zo bet degaset gant ijinadenn ar c'harr-tan, pe gentoc'h gant hini ar c'heflusker dre loskadur diabarzh.

Un diaraoger

Abaoe amzer ar c'hirri kentañ ez eus tremenet kantvedoù ha kantvedoù gant nebeut-tre a gemmoù degaset dezho ha koulz lavaret hini ebet d'an doare d'o c'has war-raok: dre nerzh an den e-unan, pe dreist-holl hini al loened-stlej (ejened pe gezeg peurvuiañ) eo e veze kaset ar c'hirri. Ret e oa d'an den kavout un tu nevez da reiñ lañs d'ur c'harr. Da heul dizoloadenn nerzh ar vurezh eo ur Gall, **Nicolas CUGNOT**, a savas ur c'harr hag a ruilhe a-drugarez d'an nerzh burezh-se. Hogen ar c'harr-se ne c'halle ket mont buanoc'h eget 3,5 Km/eur ha gant ur penad berr-tre a hent ouzhpenn. Koulskoude eo karr Cugnot an hini a vez sellet outañ evel orin an holl girri-tan.

Ur skoilh bras-tre a oa gant ober gant an nerzh dre vurezh: kemer a rae kalzik a amzer da sevel gwask a-walc'h er c'heflusker a-benn loc'hañ. Kement-se a zispleg perak eo bet lakaet an nerzh-se da dalvezout e-pad pell evit an trenioù, pa ouzer en a-raok da bet eur e vo loc'het kuit. Hogen evit mont gant an hentoù e oa ret kavout un doare all.

Ar c'harr-tan kentañ

Un den a Vro-Alamagn, **BENZ**, a voe an hini kentañ, e 1885, o lakaat ur c'heflusker dre loskadur diabarzh da gas ur c'harr war-raok. Dre leskiñ dour-tan a-darzhadoù eo e veze kaset nerzh a-walc'h da dreiñ ar c'heflusker. N'eus bet tamm kemm ebet e diaez kefluskerioù ar c'hirri-tan betek an amzer a-vremañ.



Pa ne oa nemet teir rod gant karr-tan Benz, eo dindan an anv a "bederrodeg" e voe anavezet karr-tan daou Alamann all, **DAIMLER** ha **MAYBACH**, bet diskouezet d'an dud da geñver Diskouezadeg Hollvedel Pariz e 1889. Gant ar c'harr-tan-se e oa peder rod, ur stern dir, ur c'heflusker




dre zour-tan a droe da 600 tro/mn, pevar zizh da vont etre 5 ha 16 Km/eur. Ar rodou a-dreñv a veze kaset gant ar c'heflusker, hag ar rodou a-raok, un tamm bihannoc'h, a veze sturiet. War an ahel a-dreñv e oa ar c'heflusker.
Ijinadenn Daimler ha Maybach a voe prenet ha gwellaet gant daou C'hall, PANHARD ha LEVASSOR. Diwar neuze, ur wech estaolet diazezoù ar c'harr-tan ne voe istor hemañ nemet unan a wellaennoù diniver.

Petra eo ar c'heflusker dre loskadur diabarzh?

Keflusker ur c'harr-tan a zo anezhañ miliadoù a bezhioù disheñvel ha betek 150 pezh war ahel. Kreiz ar c'heflusker, pe ar riboterez, a zo graet gant riboulerioù, a bign hag a ziskenn e bailhoù, o waskañ ar meskaj aer/dour-tan tre e-barzh ar c'hamb-leskiñ. Eno e tarzh ar meskaj-se a zo bet kaset tre e-barzh ar riboulerioù dre ar bouetaer, e-lec'h ma vez mesket

an dour-tan hag an aer hervez ar c'hempouez ret evit tarzhañ. Gant ur vrec'h e vez staget ar riboulerioùzh an ahel-pleg, hemañ o lakaat lusk pign-diskenn ar ribouler da vezañ ul lusk tro.
Gant an hej-dihej gouzañvet gant ar c'heflusker eo ret d'an holl bezhioù bezañ kreñv hag eoulet mat evit ma ne vougfe ket hemañ.



Mont a ra en-dro ar c'hefluskerioù hervez ur c'helc'hiad pevar c'houlz. Diskenn a ra ar riboulerioù en ur sunañ ar meskaj aer/dour-tan (tr. 1).
Da c'houde e pignont en ur waskañ ar meskaj-se (tr. 2).
Tan a vez lakaet er meskaj gant an elfennerezed, hag an darzhadenn da heul a gas ar riboulerioù d'an traon (tr. 3).
An aezhennoù losket a vez kaset kuit gant ar riboulerioù o pignat (tr. 4).

*




Deroù dices...

E penn kentañ e oa ar c'harr-tan ur sport evit an dud pinvidik ha droch a-walc'h da lakaat o arc'hant e seurt froudennoù. Buan koulskoude e voe merzet ar spletou anezhañ. Met ret e voe ivez tre-c'hiñ war distiz don an dud diouzh an traoù nevez-se. Poan vras en devoa Daimler da gaout aotre digant ar polis da ober arnodou war an hentou. E Bro-Saoz e voe votet ul lezenn da virout ouzh ar c'hirri-tan da vont buanoc'h eget an dud war-droad...



Ar redadeg kentañ

E 1895 e voe dalc'het ar redadeg kirri-tan kentañ etre Pariz ha Bourdel, e Bro-C'hall. Eno e voe gwelet kirri gant bandennoù-rod c'hwezhet evit ar wezh kentañ. An daou vreur MICHELIN o doa lakaet ijinadenn DUNLOP evit ar c'harr-tan. Ur Skosad e oa Dunlop hogen en Iwerzhon e oa o chom. Ur mezeg-kezeg anezhañ e teuas ar mennosh dezhañ da lakaat bouzelennou c'hwezhet en-dro da rodou marc'h-houarn e vab. Dilezel a reas e vicher da c'houde da sevel ul labouradeg bandennoù. Hiziv an deiz eo anavezet c'hoazh an anvioù Michelin ha Dunlop evel merkou bandennoù kirri-tan.



An De Dion-Bouton a 1895.
Hemañ a oa, a bell, buanañ karr e amzer.

Araokadennoù bras

E 1898 e voe graet ar c'harr-tan kentañ blienet eus an diabarzh: kement-se evel-just a vire ouzh ar blienier da vezañ dindan an amzer. Get ar Gall RENAULT eo e voe degaset an nevezadenn-mañ, un anv all chomet brudet betek an amzer hiziv. Pevar den a oa o sevel kirri-tan e 1890, ouzhpenn 100 e oant e 1900. Gant se e c'hellomp kompren pegen buan e kemmas an teknikoù da ober kirri, ha pegement a bouez armerzhel a voe dastumet e berr amzer gant ar c'harr-tan. Merkoù 'zo a zo chomet anavezet betek hon amzerioù-ni pa yeas un toullad mat a re all da get. Rak buan-tre e voe echu gant doareoù ober dornc'hwez: un dachenn eus ar greanterezh e oa deuet da vezañ ar sevel kirri-tan.

Ar brezel 14

Evel ma c'hoarvez alies gant brezelioù e voe ar brezel 1914-1918 un atiz da vont gant araokadennoù bras. E penn kentañ ar brezel ne oa nemet ur 600 a girri bennak (kirri-samm an darn vrasañ anezho) gant tu ar C'hallaoued-Saozon; e dibenn ar brezel e oa bet kresket an niver-se d'ur 150 000 karr bennak. War dachenn ar c'hirri-samm an hini e voe sevenet ar gwellaennoù brasañ. Ur wech diluet ar soudarded e oa ur bern kirri ha kalz a vlenierien akuit da ober ganto er vuhez pemdez. Kement-se a vroudas al lañs a-du gant ar c'harr-tan.



Kirri-tan evit an holl

Un Amerikan a orin iwerzhonat, **HENRY FORD**, en doa savet, eñ ivez, ur c'harr-tan, ar Ford T, e 1896. E 1906 avat e krogas da sevel kirri-tan evit un niver bras a dud, oc'h urzhiañ al labour en e labouradeg hervez pennaennoù **TAYLOR**: pep micherour ne rae nemet ul labour re-sis, ne veze ket graet gantañ fiñvadenoù diezhomm hag ar brasañ gounid a veze tennet digant ar binvioù. E 1909 e voe savet 10 607 karr e labouradegoù Ford;

Bruderezh evit ar c'harr-tan FORD, e penn kentañ ar c'hantved er Stadoù-Unanet

e 1916 avat eo 533 921 karr-tan a zeuas er-maez eus ti Ford, holl war an hevelep patrom ha gant an hevelep liv.

En holl, etre 1909 ha 1927 eo 18 milion a girri Ford T a voe gwerzhet. Marc'had-mat e oant dre ma veze gwerzhet ur bern anezho, ha gwerzhet a veze ur bern anezho dre ma oant marc'had-mat. Ouzhpenn-se e oant kirri-tan derreat-tre evit ar c'houlz: tu a oa mont da ouzhpenn 70 Km/eur ganto! An douz-se da ober kirri-tan ne voe kemeret nemet kalz diwezhatoc'h gant tud evel **CITROËN** e Bro-C'hall ha **MORRIS** e Bro-Saoz.



Ford
Touring Car
\$295

Of all the cars of the world that you can't afford to buy, this is the one.

Wherever you live - in town or country - owning a Ford car helps you to get the most out of life.

There are vehicles that represent hours of hectic morning pleasure. The Ford gives you unlimited time to get your own satisfaction every day. It is yours to enjoy the moment and to use with freedom.

There always will be great pleasure in driving a car that is a real joy to drive.

By choosing good health and all-around living, a Ford machine is your daily partner.

See your Ford man at each nearby showroom or to



Kirri-tan evit ar binvidien

Pa oa Ford o klask ober kirri-tan evit an holl gant ur priz izel a-walc'h, e oa re all o klask ober ar c'harr-tan gwellañ da ne vern pe briz. A-raok 1914 dija e oa bet krouet ar Silver Ghost (ar Spes Arc'hant) gant **ROLLS-ROYCE**, gant ar vrud da vezañ ar gwellañ karr-tan a oa. Setu ma klaskas saverien kirri all da gener o lod eus ar marc'had davet ar re binvidik. Er Stadoù-Unanet da skwer e oa ar **PACKARD V-12** hag ar c'**CADILLAC**



Ar Silver Ghost (1907)



HISPANO-SUIZA 45 CV (1931)

V-8 o rannañ etrezo ar marc'had. **MERCEDES** ha **MAYBACH** en Alamagn, **BUGATTI** hag **HISPANO-SUIZA** e Bro-C'hall ha **FRASCHINI** en Italia, an holl anezho a save kirri-tan fichet-kaer, tizh bras ganto ha na c'hallent bezañ prenet nemet gant tud pinvidik. Ar Bugatti 41 Real e oa an hini kerañ: ne voe savet nemet c'hwec'h

anezho etre 1927 ha 1933. Kement hag un daouzek ti bras bennak e kouste. Didrouz hag aes ez ae betek 200 Km/eur ha karoñset kaer-meurbet e oa. Ur metrad hanter e oa hirder ar c'heflusker paneveken, ha 2,5 t pouez ar c'harr!

Klask mont buanoc'h

Redadegoù a oa bet adal penn kentañ istor ar c'harr-tan. Met un dra a voe klasket ober diwezhatoc'h: mont ar buanañ e-keñver an amzer. Kirri-tan evel ar **SUNBEAM** (Barr-Heol) pe au **BLUEBIRD** (Evn Glas), kaset gant tud ouest evel **Malcom CAMPBELL**, a vo lakaet dezho evel fluskerioù kirri-nij evit tizhout tizhoù dibar. Da ziskouez an emdro war an dachenn-se, setu un toullad tizhoù dreist:

63,13 Km/eur	1898	Chasseloup-Laubat
105,88 Km/eur	1899	C. Jenatzy
195,64 Km/eur	1906	F. Marriott
235,22 Km/eur	1924	M. Campbell
327,96 Km/eur	1927	H. Segrave
408,72 Km/eur	1932	M. Campbell
484,62 Km/eur	1935	M. Campbell
634,40 Km/eur	1947	J. Cobb
1014,50 Km/eur	1970	G. Gabelich
1190,38 Km/eur	1979	S. Barrett

The **BLUE FLAME**, leviet gant Gabelich, a dithas 1014 Km/eur e 1970





Karroñserezh ar c'hirri-tan

Ar c'hirri-tan kentañ a voe 'oa c'hoazh heñvel en o stumm ouzh ar gweturioù stlejet gant loened: rodoù uhel ha moan, kreizenn dedennerezh uhel ha diouer a c'houder hag a zisglav. Dañjerus ha diaes e oant eta.

Dont a reas ar c'hemmoù kentañ e stumm o c'hudell pa voe lakaet ar c'heflusker en a-raok. Hogen e-pad pell e voe ret d'an dud bezañ gwisket diouzh an amzer, ha lunedoù war o frioù diouzh ar poultr hag an amprevaned. Tamm-ha-tamm e voe savet kirri klet, rannet e teir lodenn evel ma vezont kavet bremañ: ar c'heflusker er penn a-raok, an dud er c'hreiz hag ar pakadoù er penn a-dreñv.

Treset e voe kludelloù eus ar c'haerañ d'ar c'hirri-tan war-dro ar bloavezhioù tregont, ha n'eus ket bet kaeroc'h eget ar Rolls-Royce, Bugatti pe Daimler eus ar c'houlz-se. Diwezhatoc'h e voe treset ar c'hirri o terc'hel kont mui-ouzh-mui eus nerzh-stourm an aer, ar pezh a vez anvet an aerfiñvoniezh.

Un dra ret eo an aerfiñvoniezh

Pa vezit en ur c'harr-tan o vont gant an hent e c'hallit lakaat ho torn er-maez dre ar prenestr. Lakait paly ho torn ouzh an avel: un nerzh kreñv a santot. E-skoaz ma lakait ho torn a-blad ne vo ket kement a nerzh gant an avel o stourm ouzhoc'h.

Setu ma ne vez ket treset ur c'harr-tan hervez lezennoù an aerfiñvoniezh (a zo studi nerzhioù an aer ouzh kement tra a fiñv) e vo ret d'ar c'harr-tan-se dispign muioc'h a nerzh, elze muioc'h a zour-tan, da vont d'an hevelep tizh hag unan all a vo bet treset hervez al lezennoù-se!

gwir eo! re wir!



Ur c'harr-tan treset hervez lezennoù an aerfiñvoniezh: ar JAGUAR Type E (1961)



Ar BENZ Velo (1894) e voe ar c'hentañ karr-tan er bed ez eus bet savet ur rouedad ispisial anezhañ.



MERCEDES 370 S, ganet e 1930. Tizhout a rae 100 Km/eur.

JAGUAR SS 100, ganet e 1936



Ar c'hirri-tan ramzel

Mar sellit ouzh filmoù amerikan eus ar bloavezhioù 1950-1960 e welot an dud o vont gant kirri-tan bras meurbet. E-pad pell eo bet ar c'hirri-se diouzh ar c'hiz e Bro-Amerika. Ret eo gouzout e oa marc'had-mat-tre an dour-tan d'ar c'houlz-se dre ar bed hag er Stadoù-Unanet dreist-holl, hag ouzhpenn moarvat e deus an Amerikaned un doug d'an traoù divent. Ar c'hirri bras-se anvet CHEVROLET, CADILLAC pe LINCOLN a oa aes ha



Ur pezh well karr amerikan er bloavezhioù 50: ar BUICK Roadmaster Riviera, deuet er-maez e 1953



OLDSMOBILE 98, deuet er-maez e 1962 330 ch e oa galloud e c'heflusker...



Er bloavezh 1962 ivez e voe kinniget ar CHEVROLET Bel Air

Arboellañ war an dour-tan

E 1973, da heul ar brezel er Reter Nesañ, ar rannved ma vez kenderc'het ar muiañ a zour-tan, ne voe ket trawalc'h a zour-tan ken da voueta kefluskerioù ar bed. En Europa hag en Amerika e veze gwelet stredoù kirri-tan o c'hortoz o feadra dirak plomennoù dour-tan. Pa voe distro an dour-tan evit an holl e oa deuet da vezañ un tamm-mat keroc'h. Echu e oa amzer ar puihder marc'had-mat! Setu ma voe klasket kemmañ an doareoù er sevel kirri. Daou hent da glask a zo: - klask doareoù all da gas ur c'harr estreget an dour-tan (aehenn-leskif pe

alkool da skwer), pe kemmañ penn-da-benn ar c'heflusker (ur c'heflusker dre dreden e-lec'h unan dre loskadur diabarzh) - klask mont ar pellañ gant an nebeutañ a zour-tan. War an tu-se eo an hini ez eer kentoc'h an deizioù-mañ. Unan eus an traoù a bouez bras evit arboellañ an dour-tan eo reif stummoù aerfiñvoniell d'ur c'harr-tan. Unan all eo pouez ar c'harr-tan e-unan. Gant danvezioù nevez e-giz ar plastikoù ez eus tu da skañvaat pezhioù ar gludell, an distokelloù da skwer, ha graet ez eus bet kludelloù hollblastik evit kirri zo.





Ar JEEP CJ-7, gwerzhet en Europa gant kefluskeroù Renault, a zegemer reoù greñv er S-U

Deset er-maez e 1948, al LAND ROVER a zo brudet bremañ er bed a-bezh evit e zalc'h war n'eus forzh peseurt tachenn diaes



Kirri-tan sport

Evit tud zo ez eo ar c'harr-tan ouzhpenn un tu da vont eus al lec'h A d'al lec'h B buan hag aes: ur blijadur eo evit ar re-se blenian kirri buan! Setu perak e vez savet kirri-tan sport.
Ar c'hirri-tan sport klasel ne oa nemet daou blas enno, hag un doenn-gabell. Ar re anavezetañ a voe savet get ALFA ROMEO, MG ha JAGUAR. Koulskoude, goude ma voe startaet al lezennou surentez en Europa e 1970, e voe ret d'ar c'hirri-se bezañ kemmet. Merkoù zo a yeas da get, evel MG pe TRIUMPH, met kirri sport doare nevez a voe savet war o lerc'h. An Italiañed a zo mailhed war sevel seurt kirri bremañ: FERRARI, MASERATI, LAMBORGHINI.
Daoust d'o fris uhel, d'an diouer a aezamant hag a lec'h enno e plijent kalz da dud zo. Hogen n'eus ket kalz a hentoù ken e-lec'h ma c'hell an dud mont da ouzhpenn 200 Km/eur: bez' eus archerien!

Kirri evit mont er-maez eus an hentoù

Pa vez savet an darn vrasañ eus ar c'hirri-tan evit mont gant an hentoù e vez savet reoù zo evit mont war dachadoù a bep seurt. Evit gwir ur c'harr ordinal a chomfe sac'het buan e-kreiz ar parkeier. Torret e vefe aes un distroñser, distaget korzenn ar maged pe dra allhet ar bandennoù... pe marteze kentoc'h e chomfe sac'het en ur vouilhenn bennak!
Savet ez eus bet eta kirri-tan a-raozh-kaer evit mont war an holl dachennoù. Ar re gentañ e voe ar JEEP amerikan a voe karr arme ar Stadoù-Unanet. Kerez ar brezel-bed diwezhañ, hag al LAND ROVER saoz. An holl girri-tan-se a zo ret dezho bezañ uhel war o rodoù evit ma ne stokfent ket ouzh ar reier. Gant an darn vuiañ anezho ivez ez eus peder rod lusket, da lavaret eo e laka ar c'heflusker da dreñ ar peder rod ha n'eo ket div rod hepken evel ma c'hoarvez gant ar c'hirri-tan ordinal. Ouzhpenn se o devez bandennoù kreñv-tre ha kludelloù start gant ur stumm karrezek peurvuiañ. Ar c'heflusker, aes eo deoc'h gouzout, a zo kreñvoc'h ivez.



Ar FERRARI Testa Rossa (1984)

Kinniget e 1981, ar PORSCHE 944 a c'hell tizhout 250 Km/eur. Savet e vez ar c'hirri Porsche e Bra-Alanagn.



Kirri-tan rolli

Heñvel eo ar c'hirri-tan ralli ouzh ar re ordinal nemet e vez lakaet dezho pezhioù kreñvoc'h, kefluskeroù galloudusoc'h ha bandennoù ha distroñserioù arbennik. Petra da ober emañ ar c'hirri-tan-se? Ar rallioù a zo anezho redadegoù dre hentoù treuz dre venezioù, koadoù pe gouezlec'hioù a bep seurt. Ralli Monte Carlo da skwer a vez redet e-kerez ar goañv a-dreuz menezioù Europa. Setu ma vez ret d'ar c'hirri bezañ harnezet da vont war an erc'h hag ar riel. Gant ar Pariz-Dakar e vo treuzet gouelec'h ar Sahara o vont gant riboulioù e-toues an traezh.

Bleniet e vez ar c'hirri-tan ralli gant daou zen: al loman hag an eilloman. D'al loman eo da vleniañ ar c'harr ar buanañ ar gwellañ dre an hentoù spontuse ha d'an eilloman da lavaret da hemañ kement diaester a vo kavet war an hent hervez ur gartenn hag ur steuñv-redek bet prientet en a-raok. Ur fazi a-berzh an eilloman a c'hell bezañ koustus-tre, hag arabat kemmeskañ an tu kleiz gant an tu dehou pa vez da gemenn an dro-gorn gentañ!





Ar c'hirri-tan redadegoù

Anavezet mat eo ar redadegoù kirri-tan pa vezont diskouezet alies war ar skinwel. Ar c'hirri redadegoù a vez renket hervez rummadoù ha na genveskont ket etrezo. Ar Formula 1 eo ar rummad anavezetañ hag an hini a vez prizet ar muñañ dre ar bed a-bezh.

Redadegoù a vez bep an amzer e broioù disheñvel: Prizioù Meur a vez graet eus ar redadegoù-se. Hag e-giz-se e vez redet Priz Meur Bro-Saoz, hini Bro-C'hall, hini Bro-Aostria, hag all...

Hervez plas pep reder e pep Priz Meur e vez dastumet pontoù gantañ, ha sammet e vez ar pontoù dastumet a-hed ar bloavezh da c'houzout piv a yelo ar maout gantañ. Ayrton Senna, Nigel Mansell, Alain Prost pe Nelson Piquet 'zo e-touez ar rederien vrudetañ a-vremañ.

Redadegoù all 'vez, ar re hirzerc'hel, ma vez redet e-pad pell ha ma vez ret d'ar c'hirri mont buan met ivez bezañ kreñv-tre da zerc'hel miliadoù a gilo-metradoù. Moarvat hoc'h eus klevet anv eus ar 24 eurvezh e Le Mans, Bro-C'hall!



Ar PORSCHE 917/30 Can-Am Car, lonanet gant Mark Donahue, a dizhas 414 Km/eur e siz Eost 1970.

E gwirionez an holl redadegoù-se a zegas ur bern bruderezh d'ar saverien kirri-tan, rak int eo a bost arc'hant da baeañ ar c'hirri redadegoù-se, da c'ho-
prañ ar rederien hag an holl dud a vez ezhomm en-dro dezho. Koustus-tre eo met brudetoc'h e vez anv ar merk-se war-lerc'h, dreist-holl ma teu brav ganto da geñver ar prizioù meur: gwerzhet e vo muñoc'h a girri ordinal d'an den ordinal diwar ar vrud-se...



Ar Saoz Jacky STEWART a c'houezas 27 Priz Meur etre 1965 ha 1973



Kirri-tan all...

Gant ar c'harr-tan eo bet awenet an den da ijinañ a bep seurt traoù evit gwellaat aczantant an dud pe evit ober traoù a seblantfe sot a-walc'h d'an neb ha n'eo ket taget gant preñv an tizh bras. Da ziskouez an eil poent e c'hallomp menegiñ an dragster a zo anezhañ ur c'harr-tan hir ha moan, gant rodoù bihan tout en a-raok ha melloù re en a-dreñv. Ha petra e vezont lakaet da ober? Ret eo dezho mont ar buanañ a c'hellont war ur pennad-hent ken berr hag ur 400 m bennak! Dre vras e teout d'e ober din-
s eilenn bennak, da lavaret eo ez cont da gouzhpenn 360 Km/eur a-benn diwezho.

Penn a-dreñv un dragster, gant e geflusker divent. Ur c'harr re hir evit bezañ diskouezet en e bezh!

red. Ret e vez dezho stardañ gant harp ur seurt harzlamm a vez displeget en o fenn a-dreñv.

Kirri-tan all a zo bet ijinet, evel ar c'harr a goaz: gant harp un urzhia-
taer hag ur vouezh elektronek e c'hell ar c'harr lâret d'ar blenier e vez fall an traoù gant ar pezh-mañ-pezh er c'he-
flusker, pe e vez serret fall un nor...
Ur seurt karr-tan all eo an hini a sent ouzh mouezh ar blenier: un harp bras a c'hell bezañ evit an dud vac'hagnet. C'hoazh gant harp an urzhiaer hag hini ur skouarn elektronek e vez tu d'an oto seveniñ urzhioù hervez komsoù ar blenier: pa lavar "dehou" hemañ da skwer, ec'h enaouo ar gwilc'her dehou, hag all...



Ar PORSCHE Type 82. Savet ez eus bet 14 000 skouerenn eus ar c'harr-se, barrek kouls war zouar ha war zouar.




Kirri-tan warc'hoazh

An enklaskoù da sevel kirri-tan an amzer da zont a zo troet war-zu daou bal: ar-boellañ an dour-tan pe un danvez-leskiñ all (kaoz a zo a lakaat kefluskerioù da dreñ diwar ur meskañ gant alkool e-barzh), ha bihanaat an arvar, rak arvarus-tre e c'hell bezañ blienañ kirri gant an niver a wallzarvoudoù a c'hoarvez bemdez.

War tachenn ar surentez e vez pleustret war arver an urzhiataerez da ziwall diouzh ar gwallzarvoudoù: kelaouiñ ar blienier war stad fall lodennoù zo eus ar c'harr, kemenn un dañjer bennak o tont, hag all. Un doare all a zo: kreñvaat kludell ar c'harr da virout ouzh gloazadennoù grevus diwar ar gwallzarvoudoù.

War tachenn an arboellañ e klasker dreist-holl bihanaat ar c'holl ma vez diwar leskiñ an dour-tan: kalz muioc'h a nerzh a vez dispignet eget na vez ezhomm, ha respontoù a vo degaset adarre gant an aerfiñvonezh. Met kolloù all a vez gant an doare da zegas nerzh ar c'heflusker betek ar rodou...

Dindan kant vloaz ez eus bet kemmet ur bern traoù e stumm ar c'harr-tan, en e-holl er vhez pemdez, en doare ma eo bet kemmet an endro (ne vefe ket kement a hentol, a bontoù paneve ar c'hirri-tan), ha sur a-walc'h e teuto kemmoù brasoc'h ha buannañ a-benn nebeut. Met piv 'oar? Marteze n'eo ket kirri-tan a vo graet ganto evit mont aes eus un eil lec'h d'egile: tu a zo da humreal e doareoù all - leun eo al tevioù skiant-faltazi gant an humveoù-se!



Skinskeudenn eus ar FIAT 500, ganet e 1957, ha lesanvet "ar pod yasurt" dre ar bed a-bezh. Unan eus ar bihanañ kirri bet biskoazh savet, degemer a rae 4 den ha 70 Kg a baka-dou. Mont a rae da 85 Km/eur, ha ne lonke neaset 4,5 litrad a zour-tan en ur ober 100 Km a hent.

Marsel TAPIV, enklasker...





HANTRUS!
DIGALONEKAUS
HAG UN
TAMMIG
BORODUS!!

PENAOE E C'HELL MAB-DEN BEZ-
AR KEN GWIDREDS'IEZ AN DA LENN
HEMAN DEOCH, "EMAR HO KARR
DIRAK MA CHARRO. M'HO FEFEAR
VADELEZH DA FINVAL ANEZHAR
UN DOSTERIG E VEFEAN LAOEN!
UR SPONT!! AR PAOURHAETH PLACH
N'HE DEUS KARR EBET MEMES!
HEMAN NED KET KLEIZ KENN-
EBEUT "HO KWELET AM EUS O
KUITAAT AR STAL GANT HO
PAPERAD BOUED DISONJET
GANEOC'H PAER MOARVAK RAK
N'EUS ROUD EBET EUS HO...
PRENADENN EM C'HEF...
HAG ALL... HAG ALL...



An tri spes


Roparz Hemon

DAOUZEK e oant ouzh taol e maner kozh Trezion: an Aotrou Keramporz ar perc'henn, e wreg, o mab hag o merc'h, ha kerent ha mignoned bet pedet ganto.

Daoust ma n'edod c'hoazh nemet e penn kentañ miz Gwengolo, ne oa ket echu koan, ha dija edo an heol o vont da guzh a-dreñv ar gwez bras a ra ur c'hoad stank tro-dro d'ar maner.

Se moarvat a lakaas mennozhioù teñval ha romantel e pennoù an dud.

- A-drugarez Doue, n'amp ket trizek, eme unan bennak.



Hag ar gaoz o vont eus an niverenn trizek d'ur bern traoù iskis evel spesoù, sinoù, gweledigezhioù, kredennoù ha treuzkredennoù a gaver e-touez ar bobl ha muioc'h c'hoazh marteze e-touez ar vourc'hizien. Met amañ an dud, da grediñ eo, a rae fae war an treuzkredennoù.

- Pep maner kozh, eme un itron vihan, a vez kontet un istor burzhdus bennak diwar e benn. Daoust hag-eñ n'eus istor ebet diwar-benn ar maner-mañ?

Evit gwir, kozh a-walc'h e oa maner Trezion da gaout meur a istor. Traoù ar mogerioù, a lavared, a oa bet savet gant ar Romaned. Un tour da vihanañ, a oa manet tost evel er Grennamzer. Bez' e oa er chapel ur prenestr kizellet eus kantved an dugez Anna. Hag ar rest, goloet holl a ginvi hag a ilioù, a c'helle lojañ tasmanted, ouzhpenn kaouened ha brini.

- Un istor zo, eme an aotrou Keramporz, istor tri spes Trezion a zo anavezet mat er c'harter.

- O, kontit deomp an istor-se! a lavaras an itron.

- N'eo nag hir na diaes da gantañ. Gwechall-gozh, en amzer Brezelioù ar Groaz, e oa aet un aotrou a Drezion d'an Douar Santel. E wreg, cho-met hec'h-unan, a voe taget gant tri den yaouank, tri breur eus kastell Lezompan, un div lev bennak ac'hann. Dres an devezh-se e tistroas an aotrou a Drezion d'e vaner. Ne ouzon mui mat petra a c'hoarvezas, met a-benn ar fin, an tri breur a voe lazhet gantañ, hag abaoe e weler o spesoù diouzh an noz o kantren amañ...

- Dreist-holl e miz Gwengolo, eme an itron Keramporz, rak er miz-se eo e voe graet an taol.

- Na kaer eo an istor-se, eme unan.

- N'eo ket kaer tamm ebet, eme unan all. Re heñvel ouzh kant istor all am eus klevet.

- Kaer pe get, eme an aotrou Keramporz, evel-se emañ. N'oa ket evit e cheñch da ober plijadur deoc'h...





Pep hini war se a lavaras e soñj. Traoù fentus-tre a voe displeget, a lakaas an holl da c'hoarzhin.

- Met daoust hag unan bennak en deus gwelet an tri spes? a voe goulennet.

- O gwelet am eus, eme Lusilia.

Lusilia a oa keniterv an itron Keramporz: ur vaouez vras, lart, cho-met intañvez abaoe un nebeud bloavezhioù, hag a dremene an darn vuiañ eus hec'h amzer o vont e tiez ar re all, pa veze pedet, hag ivez pa ne veze ket. Paour a-walc'h e oa, hag atav naon dezhi, e tebre muioc'h eget forzh piv. Paedñ a rae evit he boued en un doare, rak dre-holl e veze graet un tammig goap anezhi, pezh a c'houzañve, evit gwir, gant ur galon laouen.

- Pensaos, Lusilia? eme an itron Keramporz.

- Ya, gwelet em eus an tri spes.

Levenez an dud ne reas evel-just nemet kreskiñ. Mard oa unan eno a seblante nebeut douget da hunvreal, Lusilia an hini e oa, gant he fas ledan hag he daoulagad digor-bras. Lavaret he doa kement-se gant ur mousc'hoarzh, met, anat e oa, hep farsal. Hag an holl da ober goulennoù: peur ha pelec'h he doa gwelet ar spesoù, ha pensaos e oant, ha daoust hag-eñ o doa komzet ganti. Lusilia avat, ne fellas ket dezhi respont. Evit ur wech e hañvalas bezañ feuket gant o goaperezh.

- O gwelet am eus, a lavaran deoc'h. Ha bremañ, trawalc'h! emezi.

Ar re all n'o doa ket bet trawalc'h koulskoude. Ar re yaouank dreist-holl, Lusian, mab an aotrou Keramporz ha filhor Lusilia, ur paotr tri-wec'h vloaz, atav seder, atav prest da c'hoari un dro gamm, a reas sin d'e c'hoar Anna ha da Rojer, danvez-pried e c'hoar Anna. Ha setu-int o-zri da vont d'al liorz. Ne badas ket pell. Kinnig Lusian a voe degeret raktal.

- Sur a-walc'h, en doa lavaret Lusian, e kemer Lusilia ac'hanomp evit sotoc'h eget ma 'z omp. Deomp da spontañ anezhi. Ni a ray an tri spes.

Kambr Lusilia a oa en ur c'horn en estaj uhelañ ar maner, pellik diouzh kambroù ar re all. Da vont di e ranked tremen dre un doare pon-



dalez a-ziavaez e penn skalieroù strizh. Eno e vije graet an dra.

Ar c'horonad kozh Rospenn a voe karget da zerc'hel Lusilia betek hanternoz. Aezet e oa. Ne oa nemet goulenn digantl c'hoari domino hag he lezel da c'hounit. An tri a yeas da glask liñserioù, bonedoù noz, luno-doù du ha kement tra rekis da ober spesoù a-zaore.

Tost hanternoz e oa. E penn ar skalieroù strizh, dirak dor Lusilia, edo an tri spes oc'h ober ged. Bannoù al loar a gouezhe war ar pondalez: netra dereatoc'h evit spesoù d'en em ziskouez.

Hanternoz a sonas. Un trouzic a glevjed en traoñ. Unan bennak o pi-gnat gant an diri. An tri spes en em renkas start ouzh ar vogez, asten-net o gouzoug da welet.

An trouz en traoñ a greskas. Tostaat a raee atav. Iskis e oa an trouz-se. Tamm ebet heñvel ouzh kammedoù ur vaouez. Lavaret e vije bet kentoc'h meur a zen o tont. Bez' e oa ouzhpenn chadennoù o stirlinkat hag huanadoù damvouget. Ma savas strafuilh ha nec'hamant e kalon an tri spes.

An trouz a greskas c'hoazh. Daoust ma oa sioul an aer, e kleved evel ur gorventenn o frañval. An tri spes en em stardas muioc'h ouzh ar vogez, en em stardas an eil ouzh egile, a vennas tec'hel, nemet o divesker a vankas dindano: war ar pondalez e tremene tri den barv hir, treut-ki, gwisket evel en amzer wechall, ur chadenn etrezo, o stlejañ badili pounner ouzh o zreid.

Pemp munud goude, Lusilia, gounezet ganti c'hwec'h lur warn-ugent ha dek gwenneg en ur c'hoari domino, a bignas ivez gant ar skalieroù, ken dibreder ha tra. War ar pondalez e kavas tri den yaouank, tamoladet e pep a liñser, o fennoù o horjelloñ goustad hag o dent o stlakañ...



Ur sell war hon Istor

Roueed Breizh: ... eus Salaun da Alan-Veur

Roet gantañ taol ar marv da Erispoe, "Salaun a dapas krog e kurunenn e gendery hag he lakaas e-unan war e benn". Deuet e oa an irienner da vezañ roue.

E 857 emdamp...

EVEL Erispoe e talc'has Salamun, pe Salaun, d'ober brezel da Carl-Voal ha d'ar Franked.

Evit dont a-benn eus e daolioù en em glevas gant enebourien Carl-Voal: Loeiz ar German, breur Karl, da gentañ, hag

e vab, Loeiz ar Gag, zoken (d'ar mare-se n'eo ket ar gengarantez a veze bepred o ren er familhoù, evel a weler!).

Trec'het meur a wech, ret a-walc'h e voe da Carl-Voal klask kaout ar peoc'h gant e amezeg breton. Sinet e voe ar feur-emglev kentañ e 863 ha tizhout a reas Salaun kaout "an douar etre an daou zour", da lavaret eo an douar a zo etre ar stêr-Mayenne hag ar stêr-Sarthe.

Ne oa ket trawalc'h evit Salaun. En em glevet a reas ar wech-mañ gant an Normaned. Preizherien dispart a oa eus ar baotred-mañ. Hag int da rentañ ar gweled da vro ar Mans ha pelloc'h zoken, betek Tours. Trawalc'h da reiñ da gompren da Carl-Voal eo ur feur-emglev nevez a oa da vezañ sinet...

Sed a voe graet e 867. Tapout a reas Salaun ar c'hCotentin hag an inizi steg outañ (an inizi anglo-norman d'an deiz a hiziv).

Deuet oa Salaun da vezañ "Prifc Breizh hag ul lodenn vat a c'hGalicia"...



Salaun, roue pinvidik ha brokus


N'eo ket troiadoù touristañ a rae arme Salaun e Bro ar Franked, aes eo kompren.

Ne veze ket goullou chakodoù ar soudarded o tont d'ar gêr hag o rous a denne un tamm mat a vadoù diwar e zouarou nevez gounezet ivez. Breizh, o vevañ e peoc'h peil diouzh an tachennoù brezel, a oa aet he ekonomiezh war binvidikaat. Ma oa galloudus, pinvidik e oa deuet ar roue Salaun da vezañ ivez.

Aes e oa d'ar Roue bezañ brokus gant an Iliz a veze dreist-holl d'ar mare-se diwar donezonoù an dud uhel.

Pa zeuas Salaun, e 869, da weladenniñ abati Fielann, n'eo ket profoù dister a oa gantañ: ur c'hallir aour ouzhpenn 10 lur a bouez enañ ha klinket gant 313 maen prizius asambles gant ur bladenn aour a 7 lur hanter a voe profet d'an abati. Ur groaz aour 23 lur gant 370 maen prizius a oa ivez ha meur a arc'hig en aour pe en olifant.

Dilhad iliz gwriet gant neud aour ha tapisoù a dalvoudgezh a oa ouzhpenn, ha meur a levr aviel pe buhez-sant gwis-ket kaer ha rikamanet. Sed a oa ur prof rous...



Salaun, roue barner

Meur a "lez" (kastell) en doa Salaun dre ar vro, ouzhpenn ugent moarvat. Savet e oant e koad war diazezoù mein, evel ma oa ar c'hiz d'ar mare-se.

Mont a rae Salaun eus e eil lez d'eben gant ur goskor niverus en-dro dezhañ: tierned ha marc'heien, floc'hed, mevalien, tud a Iliz, barzhed. O roll d'ar re zivezhañ-mañ a oa kanañ taolioù-kaer o mestr. Siwazh n'eo ket deuet betek enomp ar barzhonegoù bet savet ganto.

Pa zegouezhe Salaun en unan eus e lezoù e veze gwelet an dud o tont d'e gaoz evit diluziañ o aferioù: brudet e oa Salaun da vezañ ur barner mat.

Daoust ma oa bet muntrer en e yaouankiz e oa deuet, war a lavarer, da vezañ difenner ar re wasket ha tamaller didru- ez evit ar re gablus. Net eo lâret ivez e ranke Salaun tougnañ o fri d'e diarned re c'hosntek. Anez se e vije deuet buan da goll e c'halloud war e vro.



KAMP AR ROUEED

(L.K.)



Salaun ar merzher

En em dennañ a reas Salaun e Koad Breki-
lien, e 874, da ren ur vuhez a binijenn,
da zaspren e bec'hed yaouankiz emichaña.
E guzulierien a rae war-dro renerezh ar
vro en e anv.

Sofjal a reas neuze d'an dierned o doa
ranket plegañ dirak ar roue e oa deuet
ar c'houlz da sevel o fenn. Paskwiten,
mab-kaer Salaun, ha Gurvant, mab-kaer
Erispoe, a oa e penn an irienn. Hag an
daou-mañ en hent evit mont da lazhañ
Salaun.

"Pig pe vran a gan"... Mont a reas ar
vrud betek Salaun. Kuitaat a reas hemañ
e lochenn er c'hoad evit mont da glask
repu en unan eus e gestell: Kastell-Bran
e-kichen Pondivi. E enebourien da c'hwe-
zhañ an tan er c'hastell.

Dont a reas Salaun a-benn da dec'hel
ha da gavout bod en ur manati. En em
zaskor a reas neuze evit klask saveteif
e vab a oa stre daouarn e enebourien.

Ar re-mañ avat a voe didruez: o-daou e
voent boureviet ha lazhet ganto.

Goude ur vuhez ken klodus hag ur marv
ken kriz e voe graet ur sant eus Salaun
gant ar Vretoned.



*Pezh monreiz zour skot e Roazhon
an amezh Salaun*

Breizh disrannet

An daou iriennner a lodennas ar vro
etrezo: an hanternoz da c'hGurvant hag
ar c'hreisteiz da bPaskwiten. Un treuz-
varc'had ne oa ken hag, e-giz ma c'hoar-
vez alies gant al laeron, bec'h a voe
etre an daou evit klask kreskiñ pep hini
e lodenn diwar goust egile ha ren war
ar vro a-bezh zoken. Ha brezel dezhi...

O mibien, Yudikael hag Alan, a gendal-
c'has gant an tabut hag an engannoù gou-
de marv o zud.

Ne voe ket seizhdaletoc'h an Normaned
o tont d'ober troiadoù preizhata war
zouar Breizh. Mont a reas ar c'hCotentin
gant da stagañ ouzh o bro nevez: Nor-
mandi. Hag int d'en em ziazezañ zoken
e kreisteiz ar vro, e penn ar stêr-Liger
hag ar stêr-Wilen ha war aodoù Bro-Wened.



*An Normaned o preizhañ ...
(hervez pallenn-voger Bayeux, XIvet kantved)*



Bec'h d'an Normaned: Alan-Veur

E 888, goude marv Yudikael, bet lazhet
gant an Normaned war an dachenn engann,
setu ar vro a-bezh o tegouezhout gant
Alan.

Brezelour ampart ma oa, hemañ a glas-
kas reif lamm d'an Normaned a veze gwe-
let o vont hag o tont dre ar vro evit
he gwastañ.

E Kistreberzh e voe ar c'hrogad. War
un uhelell, a-us da draonienn an Toc'hoù
e oa lu Alan. Alese e oa aes d'ar Vre-
toned bannañ o biroù hag o goafoù war an
Normaned a oa o klask dont d'al laez get
an diribin. Ha setu meskadeg e-touez ar
re-mañ. Deuet e oa ar mare d'ar varc'h-
gerien vrezhon da vont d'ar gad hag int
d'ar red d'an traoñ war o c'hezeg lijer
en ur ober distruj bras ha gwall zispenn
e-touez o enebourien. Brav d'ar re-mañ
ma c'hallent tec'hel kuit. Nebeut anezho

a erruas betek ar mor e-lec'h ma oa o
bagoù ganto. Hag int pelloc'h ar buanañ
ar gwellañ.

Diwar neuze e voe anavezet Alan da
roue nemetañ war Breizh ha lesanvet e
voe Alan-Veur abalamour d'e drec'hioù
kaer...



Breizh Alan-Veur, Breizh a-vremañ


N'eo ket ur vro ken yac'h-se en em ga-
ve Alan e penn anezhi avat.

Kentañ tra a oa da ober a oa argas an
Normaned eus al lec'hioù ma cant diaze-
zet. Ne voe ket ken diass an afer-se:
trawalc'h e voe brud engann Kistreberzh
erruet betek enno da lakaat ur c'halz
anezho da vont larkoc'h.

Bezañ roue en e vro a voe ivez kompe-
zañ an helebini etre ar gonted (pe ar
vac'htierned) a save chikan etrezo ken
bennak. Klask a reas Alan diskouez da
bep hini betek pelec'h e yae e lodenn.

Diwar se e c'halle ren "war an holl
Vretoned". Ha war ar re-mañ nemetken rak
kollet e oa da vat an douaroù a oa bet
skrapet gant diaraogidi Alan-Veur diouzh
kosteiz ar c'hCotentin, ar Maine pe an
Anjou. Chom a rae Breizh hag he marzou
kozh e dalc'h Alan-Veur. He harzou a
neuze a zo chomet gant hor bro abaoe.

Clément Dagobert



AN TORR-PENN

Dek goulenn a gavot amañ: arabat deoc'h krediñ ez int ken des a se!

1. Peseurt furm-sonerezh eo meulgan Breizh-Veur, *God Save the Queen*: tango? ton-bale? valseñ? menued?
2. Piv eo ho kar nesañ etre breur-kaer breur ho mamm ha c'hwi ho-unan?
3. Ma vez lavaret deoc'h gant ho mezeg lonkañ teir boulig-dramm war-bouez unan bep hanter- eurvezh, pegeit amzer e vo ret deoc'h tremen evit kaout an distag diouto?
4. Bemez e ya ur micherour d'e labour gant an tren. Tremen a ra un eurvezh ha ugent munud evit mont, an tren o vont da 60 Km/eur. Hogen ne bad ar veaj nemet pevar-ugent munud evit an distro, d'ar memes tizh! Penaos displegañ kement-se?
5. Bodet er sal-debrñ ez eus c'hwec'h den - unan deuet, tri c'hrennard ha daou baotrig - oc'h arvestiñ ouzh un tren bihan dre dredan o vont gant e hent. A-daol-trumm e lâr unan eus ar vugale: - Dal 'ta! Ne'm boa ket merzet e oamp seizh amañ!
Perak e lavar kement-se?
6. War un hent eun ez eus daou zen war velo o vont a-benn an eil d'egile da 25 Km/eur. Pa n'eus mui nemet 50 Km etrezo e teu ur gelienenn war unan eus ar marc'hou-houarn. Nebeut goude e nij kuit hag e ya war ar velo all, hag evel se e ra, o nijal da 30 Km/eur, betek ma teu an daou zen a-benn an eil d'egile. Pet kilometrad an deus nijet al loenig?
7. Eus penn ho piz-yod, eus dindan ho troad pe eus beg ho teod, pehini eo ar c'hizidikañ ouzh ar stok?
8. Petra 'vefe ar marc'hadmetañ evi-doc'h: kas unan eus ho mignoned div wech d'ar sinema, pe kas daou eus ho mignoned war-un-dro?
9. Peseurt hed e c'hell ur velc'hwe-denn-grogennek redek dindan un eurvezh?
10. Bez' ez eus ur voutailh peurstan-ket, leun a eoul, o neual war ur poull. Neual a ra war he sav pe war he gourvez?

DISKOULM C'HOARIOU TALABAO 6

Ar silizherenn

C'hwedif, reuz, kaot, rusk, moger: D.

Ar miliner, e vab hag ar seier



Kregiñ ha sevel a ra ar mab ar sac'h 15 Kg, a zo peurstardet gant an tad. Kregiñ a ra ar mab ar sac'h 30 Kg, hag e sevel a ra en lakaat ar sac'h 15 Kg da ziskenn. E-pad ma vez peurstardet ar sac'h 30 Kg gant e dad, diskregiñ a ra ar mab ar sac'h 15 Kg, ha lakaat a ra ar sac'h 45 Kg en e blas. Sevel a ra ar sac'h 45 Kg, a vo peurstardet gant an tad e-pad ma vo diskroget ar sac'h 30 Kg gant ar mab, ha lakaat ar sac'h 60 Kg en e blas. Sevel a ra ar sac'h, ha diskroget e vo gant an tad e-pad ma vo lakaet ar sac'h 15 Kg e plas an hini 45 Kg gant ar mab, hag e-giz-se betek ma vo savet ha diskroget an holl seier!

Poellit c'hoazh!

Dre Lemel al lizherennoù dreiste-zhomm e kavot ur fraezenn voutin:

ALUL IRZFHERRAEZ NENNONUVDRU
EUISTTEZHIOMM





TALABAO, embannet gant AN HERE, 16, straed Jules Henriot, Kerdrezeg, 29000 KEMPER. Rener ar gazetenn: Alan DIPODE. Kasit gwerz ho koumanant da dTALABAO, Hent-dall Kergelenn, 29112 LANDUDAL. 120 Lur ar bloavezh. Koumanant skoazell adalek 150 L. Koumanant evit ar broioù estren: 150 L. Chekenn da vezañ karget en anv AN HERE. Diskleriet hervez al lezenn c'hall Genver 1988. Lezenn c'hall 49-956 ar 16-07-49 a-zivout an embannadurioù evit ar yaouankiz. Lakaet er moull e ti gKloatr, mouller e Sant-Tonan, 29220 LANDERNE, Breizh.

© AN HERE, 1988.